

foliole de 1903 1905.  
François Le Guyader

AR MINOR

(Fouilhez)

A Baoé 'n oad a dri bla, me zo maget minor  
Me meus c'hoan da ziskleriañ ul lodenn deus va sor.

C'hoan am eus da ziskleriañ <sup>ur</sup> darn deus va buhe  
Pehini meus tremenet beteg an devezh-hirie.

Gan an derchenn a gredan e oa maro va zad  
Va mamm chomet intañve, na pebezh kalonad.

— Va mamm chomet intañve gan he zeizh kroadur  
He c'halon oa dinerzhet gan an displijadur.

Seizh minor chomas gati deus ar re yaouanka  
Ar c'hosañ nê oa unneg vla, me oan ken me tri bla.

D'ar poen-ze, me oa yaouank, bian er jaketenn  
Allas, me ne ouien ke peta ma da dremen.

Deus ar beure pa zaven, me mije kalonad  
Na pa teue da choñj din e oa maro va zad.

Med, va mamm, plac'h a gouraj, honnezh va c'honsole  
A lavare din bemde mije ur bragoù neve.

Graet e oa din ur bragoù hag oa graet ga lien  
Evel <sup>ur</sup> oa giz gwechall, gwechall <sup>ga' r</sup> gan ar beorien.

ga' = gant

Pa oa gwisket va bragoù, aet e oan da bourmen  
Da soued ar blavezh-mad d'an holl amezeien.

Bed em oa be gwenneien, kignez hag avaloù  
Toud an dud a lavare din e oa drol va bragoù.

Hennezh e oa ur bragoù ha ne oa ke graet prop  
Kar an hanter deus e foñs e oa laket a-rog.

*Rak* Hennezh oa graet din-me diga va c'hoar gosañ  
Ne oa ke kemenez, na ouie ke tailhañ.

Med, pa oan deut d'an oad da roul va yaouankiz  
Din-me oa graet ur bragoù hag e oa deus ar c'hiz.

Neuze, me a ebate, gemere plijadur  
Ha va zud oa dimeet, aet gan o avañtur.

Dimeet oa va zri breur, dimeet va diw c'hoar  
Ur breur all chomas ganin da laboura 'n douar.

Hon-daou, chomom gan hon mamm 'vid derc'hel an tiegezh  
E-mesk al labour, ar boan ha kalz a baourentez.

Med, d'an oad a drivec'h vla, moa bet un aksidant  
Neus beuzet va c'halon en ur mor a dourmant.

Me moa choñjet beajiñ, don da guitad ar gêr  
Choñjet ober va fortun e-barzh e berr-amzer.

Med, va mamm pa na klevet, a lavare din-me  
"Petra ? amezi, va bugel, petra a choñjez-te ?

Me meus diouret da dad, savet seizh kroadur  
Na te eo ar yaouankañ, te ra va flijadur.

Ma c'hez-te e-maez ar vro, don da guitad ar gêr,  
Me vo oblijet neuze da verzhañ mobilier.

Ha, ya, goude kemen-se, da blec'h ac'h in-me ?  
Vin tolet ha distolet deus an eil ti d'egile."

Ha, pa meus klevet va mamm gan he c'homzoù agreab  
Na me strinkas an dâeloù demeus va daoulagad.

Me o chañj santimant, hag a choñjez-hom gati  
Na goude vije maro, c'hajen da veaji.

Va mamm oa erru kozh, alies vije klaoñ  
Be noa be ur c'hleñved hir, unneg pe daouzeg vla.

A-benn daou vla da c'houde, va mamm deut da vervel  
Gras en 'ma er baradoz, er joaioù eternal.

Va breudeur ha c'hoarezed deut neuze d'ar gêr  
Evid goulenn o fartaj demeus ar mobilier.

Ha gwerzhet ar mobilier, partajet an arc'hant  
Peb hini gavet e lod, oa partiet kontant.

Na me oa choñjal neuze, pa oan c'hoazh pot yaouank  
E rafen ur marc'hadour, a c'honijen arc'hant.

Me, ne oan ke bet er skol, moa ket a ziskamant  
Nag an dra-he rea din kalz a ziaesamant.

Prenet moa ur c'haier hag ur levrig bian  
Me moa disket skriv' ha lenn da-ouzhin va-unan.

Ha ragtal en un instan e oa deut en va spered  
Ma c'hafen da veajiñ, a ziskfen ar galleg.

Bed on be marc'hadour-zaout, marc'hadour-babiolez  
Ha marc'hadour-pezh-glas, marc'hadour-patatez.

Marc'hadour-avalou, marc'hadour-boeson  
Anvet oan "Pot-a-giz-mad" e-barzh kêr Lanuon.

Graet em eus ive marc'hadour-brikoli  
Honnezh zo ur vichar vad, neb a oar anezi.

An hini bren marc'had-mad, ha goude gwerzhañ ker  
Hennezh ra e fortun e-barzh e berr-amzer.